

KENTOC'H MERVEL

Kantik ar Gonfirmasion

WAR DON : Chileoet gand spont hag eston, pe eun all.

DISKAN

*Kentoc'h mervel, o ma Doue,
Evel bean traitour d'am fe,
Kentoc'h mervel, pen on bugel,
'Vit ober eur pec'hed marvel !*

Ar Vretoned koz, hon zado,
A lere d'o bugaligo :
Kent 'vit bean traitour, bugel,
Eur Breton mad a gle mervel.

War ma badeiant 'meuz touet
Bean da Jezuz-Krist bepred :
D'am gir e renkan-me derc'hel :
Kristen e vin bete mervel !

Mar n'on nemet eur bugel c'hoaz,
Eur bugelig dinerz, ziouaz !
Gant zikour ar Spered-Santel,
Me vo fidel bete mervel.

Ar Rouanez Wenn, ar vamm vad,
A lere da zant Louiz, he mab :
O ma mabik, gwell eo mervel,
'Vit ober eur pec'het marvel :

Me 'meuz bet eur vamm vad ive :
'Vel mamm zant Louis e lere :
Bet sonj, mabik, vo red mervel
Kent 'vit ober pec'het marvel.

Otrou Doue, mar am c'haret,
Otro Doue, ma chileoet,
Ha gret d'in ar c'hras da vervel
Kent 'vit ober pec'hed marvel.

D'ar baradoz, o ma Doue,
Me iei d'ho kwelet goude-ze :
Ar baradoz zo d'ar bugel
A varo hep pec'hed marvel.

L. S. E.

KANTIK

AR VUGALE DA ZAND ERVOAN

WAR DON : *Ar mousik bihan.*

Azo ar Genkiz a lere
D'he mab Ervoan Kervazin :
« Mabig, emei, noz ha beure,
» C'houi bedo war ho taoulin.
» Laret zo d'in a-beurz Doue,
» Pa oac'h bihan, ma bugel :
— « Da vab Ervoan a vo eun de
» Eur zant braz en Breiz-Izel. »

DISKAN

*Otro zant Ervoan vinniget,
Ma zant Ervoan Breiz-Izel,
Enn han' Doue ma zikouret
Ha me vo bete mervel,
Me vo eur zant, eur zant ive,
Evel ma oac'h en bugel,
Hag eun devez em o en Ne,
Ma lod gand zent Breiz-Izel.*

Ervoan a c'hoerze e lagad,
O klevet e vamm Azo,

Ha daoulinet tal e vamm vad,
E lere e bedenno.

» Mar am c'heret, o ma Doue,
A levere ar bugel,

» E vo Ervoan eur zant neve

» D'e vroik kez Breiz-Izel. »

Aked vraz an ije bemde

Da lenn bue zent ar vro,

Ha goude pedi e kleske

Ober evel-t-e d'e dro.

» Reit d'in, ma Doue, emean,

» Adalek ma on bugel,

» Roet d'in ar c'hras da vean

» Eur zant vel zent Breiz-Izel. »

Ne gere netra barz ar vro,

Vel e iliz Landreger :

En ofern hag er gouspero,

Ervoan a gane zeder.

» Eun de me vo, ebars ann Nê,

A levere ar bugel,

» Hag e kanin gand an Ele

» Ha gant ma zent Breiz-Izel. »

Gouelan a re o kimiadi

D'e vamm Azo ar Genkiz.

Gouelan 're d'e dad Helori

'N eur vont da skolio Paris.

« Da Baris ma renkan monet,

A levere ar bugel,

» En Paris, me vo fur bepred,

» Vel em broik Breiz-Izel. »

Ne oa ket mesk ar iaouankiz,

O ! nan, ne oa ket unan,

O studian en ker Pariz,

Furoc'h vit ma oa Ervoan.

En Paris kerkoulz hag er vro

N'ankouez ket ar bugel

Pez a lere e vamm Azo,

Pe oa 'n e vro Breiz-Izel.

En Breiz-Izel, o ma Doue,
A zo c'hoaz kalz a vammo
Hag a lavar d'o bugale,
Evel ma lere Azo.
Ha pa 'ne gret e bask kentan,
E leront hi d'o bugel :
« Deut, bugel, deut da bardonan
» Da zant Ervoan Breiz-Izel. »

« N'onn pera vefet 'n o pue,
» N'onn pelec'h veet kaset :
» Gant ober bolante Doue,
» C'houi vo evuruz bepred. »
Evel-se lavar ar vamm vad,
O tonet gant he bugel,
O tonet da westan he mab
Da zant Ervoan Breiz-Izel.

Hag en Landreger daoulinet,
En kichen Be zant Ervoan,
Ar bugel kez an euz laret
Vel Ervoan, pa oa bihan
« Otro zant Ervoan, emean,
» Me n'on nemet eur bugel :
» Evel d'hoc'h me garje bean
» Eur zant d'am bro Breiz-Izel.

» Gant ma vo bolante Doue,
» N'euz fors pelec'h vin kaset :
» N'euz fors pera vin em bue,
» Me a vezo fur bepred.
» Zand Ervoan, c'houi am zikouro
» Adaleg ma on bugel,
» Hag evel-d-hoc'h 'm o en Envo
» Ma lod gand zent Breiz-Izel »

Kalon dous ma Jezuz. beet ma c'harante !
Kalon douz a Vari. beet ma zilvidigez !
Sant Joseph, pedet evid-omp ! L S. E

IMPRIMATUR :

Saint-Brieuc, le 4 mai 1895.

AUG. CHATTON, *can, vic. gen*

Imprimerie Saint-Guillaume. — St-Brieuc